

Bet skrivet e galleg gand **Paul Cadiou** (?), troet e brezoneg gand **G. Henry** (?)

Fall a-walh eo an droidigez a-wechou. Reizet eo bet.

Meliner Bod-Kador, bet embannet e galleg hag e brezoneg e Montroulez e 1908

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Implijoud a ra “pehini“ e-leh “an hini“, evel an darn-vrasa euz skivagnerien an amzer-ze. N’eo ket bet merket bewech.

Meliner Bod-Kador

Kenta avest

Kenta taolenn : Merouri Koad Free.

Eil taolenn : Melin Bod-Kador

Eil arvest

Trede taolenn : Plasen Bulian.

Trede arvest

Pederved taolenn : Milin Bod-Kador

Pemped taolenn : Stank Keriell

C’hoarierien

Soazig ar Brihan : plah yaouank ugent vloaz.

Michela : plah yaouank triweh vloaz.

Mari-Job : mamm Soazig, tri-ugent vloaz.

Alanig Derrien : miliner, pemp bloaz ha tregont.

Jord an Duk : kartier-mestr, pevar bloaz warn-ugent.

Charlez ar Floh : gabier, daou vloaz warn-ugent.

Youenn : mevel koz.

Eur hlasker an aluzenn, peizanted, peizantezed.

Al leh-c’hoari a dremen en on amzer war-dro Lannuon.

Kenta arvest

Kenta taolenn

Diabarz merouri Koad-Free da zerr-noz. Mari-Job 'erru, oajet, ha seblant klañv e-tal an oaled, war eur skabell, tro he hein d'ar prenest. Soazig 'zo en he sav, a-dreñv dezi. Alanig 'zo azezet war bank ar gwele-kloz, e fuzuill en e gichenn.

Kenta leh-c'hoari

Alanig, Mari-Job, Soazig

Alanig

(braz, kreñv, e zell didruez).

Krena a rit an derzienn, Mari-Job, ho tal 'zo en c'hwezenn, lavaret e vefe eun doenn zoul o tivera gand ar glao.

Mari-Job

Homañ, terzienn lenn Keriell am-eus tapet setu hebdale tregont vloaz 'zo, pa on deut da chom en draonienn-mañ, abaoe n'he-deus ket va huiteet ; mez 'n em blijoud amañ ha n'em-eus ket a hoant da lezel va zammig koz korv e leh all.

Alanig

Ha c'hwi, Soazig, ha karoud a rit-hu ivez ar vro-mañ ?
(Ober a ra eur zin a gonzantamant)
Ha kollet ho-peus-hu ho teod eta ? plah yaouank iskiz.

Mari-Job

Siazig, respont 'ta d'ar mestr Alanig.

Soazig

N'em-eus netra da lavared dezañ.

Alanig

(gand ruster)

Ma ! neuze, pa zalhit kemend a jom er vro-mañ, e vo red deoh paea gand aked ho kouel-Mikêl, rag me 'zo deut da rei da anaoud deoh emañ o paouez prena merouri Koad-Free, mez nann hephen hi he-unan ; prenet am-eus c'hoaz ar Banalu, ar Gernevez, hag ar Roz-Du ; prenet am-eus ivez gwaremmou ar Bodino beteg Tonkedeg. Va hleved a rit, Soazig ?
(Ar plah yaouank ne fiñv ket).

Mari-Job

Soazig, me az ped...

Alanig

(o troha he homz)

Lezit anezi, gouzoud a ran he-deus kas ouzon.
(O terhel da gomzdroug ennañ).

Bremañ ar vro a zo din peder leo tro-war-dro. Me eo ar mestr. Me hell difonta ar gwaremmou, diskar an tiez, diframma ar vein diwar an toennou, ober gand al lochou hag ar hrevier koad-tan, tennañ ar gwez, lezel an douar en viaz¹, evel m'am-mo c'hoant.

¹ en viaz : ? en dilez.

Mari-Job

‘N em drankillit, mestr Alanig : ma ne anavezjed ahanoh evid ar muia reizet deuz ar vro, e lavarjed ho-pije evet.

Alanig

(hep he hleved)

Gouzoud a rit, gouel Mikêl a zegouez diriaou genta ?

Mari-Job

Ya, ya, ho paea a refom, bezit dineh.

Alanig

Gweled a refom, a-hend-all, gouezit mad, me a hell lakaad kregi er pezh a zo amañ oll, ar gwele en hini² e kouskit, ar pres ma ennañ ho tillad, an arh, an orolaj, ar loened... Ar verouri-mañ a zo din, c’hwi ‘zo din, Mari-Job.

Mari-Job

Mestr Alanig, n’om ket koulskoude esklavourien evid beza prenet pe gwerzet evel loened ; n’om nemed ho merourien.

Alanig

(gand muioh-mui a zroug)

Ha Soazig ivez a zo din !

(Kuitaad a ra Mari-Job ar prenestr ouz an hini ‘oa harpet, ha distro war-zu ennañ, he sell lugernuz, he divreh kroaziet gand eur stumm a zisfi).

Soazig

O se, biken !

Alanig

He divunet am-eus eta erfin ; me ‘lavar deoh penaoz c’hwi ‘zo din.

Soazig

Biken !

Mari-Job

Mestr Alanig, c’hwi a ra aon d’ar bugel-ze.

Soazig

(o sevel he dioukoaz)

Aon din-me ? Lezit anezañ da harzal eta, va mamm, ne hell ober netra a-eneb deom.

Alanig

(o sevel)

Ma ne baeit ket ahanon, me ‘hell lakaad ho tiloja, memez, tra eun nozvez goañv. Soazig, me ‘ziframmo ho krap-broz³ glaz hag ho koef gwenn ; me em-bo anezo, na pa vefe nemed evid ho lakaad war va halon, e-barz em bez... C’hoant am-eus d’ho kaoud evid pried, Soazig, c’hwi her goar mad.

Soazig

Mamm, diod-ter eo !

(Skei a reer war an nor).

² en hini : en ehini, er skrid orin.

³ ho krap-broz : ho korvenn.

Eilved leh-c'hoari

Ar memez re, Youenn

Youenn

Noz vad d'an oll ; setu amañ an arhant. (*Lakaad a ra eur yalh war ar skaoñ*). An onner 'zo 'n em werzet mad : pemp skoed warn-ugent. N'am-eus ket gwelet aliez ker brao foar en Lannuon ; pres 'oa war ar blasenn.

Mari-Job

Eur priz mad eo ; kemerit eur banne a-raog koan.
(*Da Alanig, an hini e-neus greet an êr da weled netra*).

Ar re-ze eo arhant ho kouel-Mikêl, mestr Alanig ; gweled a rit ne dalveze ket ar boan ober kemend a istoriou ha kemend a drouz ; mar keret e voh paeet dioustu.

Alanig

(*o hoapaad*)

Doue am diwallo a ze ! n'em-eus gwir war hoh arhant nemed da houel-Mikêl ; A ! A ! C'hwi 'peus skoedou eta ; mad eo, c'hwi 'deuio d'am faea diriaou da Vod-Kador.

(*Skei a reer war an nor*).

Mari-Job

Piou 'zo aze c'hoaz eta ? Antreit !

Trede leh-c'hoari

Ar memez re : Jord

(He dremm o cheñch doare, Saozig ah a d'e gaoud o starda dezañ gand karantez e zaouarn).

Soazig

C'hwi eo eta Jord. Abaoe pegoulz oh-c'hwi eta er vro ?

Jord

(o vousec'hoarzin)

Mez abaoe ar beure-mañ : gweled a rit, va henta gweladenn a zo evidoh. Deiz mad deoh, itron ar Bihan, ha c'hwi ivez Youenn, ha mestr Alanig.

(Hemañ a respont gand eun hijadenn inouuz d'e benn).

Mari-Job

Vad a ra din da weled, va faotr ; da veaj er Chin a zo eta echuet ? Mez petra ah-eus aze a ruz war da vañchou ? Me a zo fall em gweled, te 'wel.

Soazig

Galoñsou eur hartier-mestr fuzuiller, ha war e beultrin, sell, mamm, ar vedalenn vrezel evid e gunduit kaer en atak ti ar gannaded en Pekin ; ha n'az-peus ket te a zoñj em-oa lennet dit ar gazetenn d'ar poent-se ?

Mari-Job

Ya, gwir eo : Jord, foug e vo ahanout er vro.

Jord

Ha c'hwi, Soazig, bepred kaerroh-kaer.

Soazig

(o tond ruz)

Ha c'hwi, Jord, atao ar memez hini, mez eun tammig melennoh avad.

Alanig

(en eun taol-kont ha gand ruster)

Arsa, petra an diaoul oh-c'hwi deut d'ober amañ, Leduc ?

Jord

(o c'hoarzin)

Mez kredabl, evel-doh-c'hwi, eur weladenn a vignonaj vad *(o selled ouz Soazig)*, goude beza bet keid all deuz ar gêr !

Alanig

(froudennuz)

Me 'zo deut da zisklêria penaoz on deut da veza perhenn da Goad-Free.

Jord

(o c'hoarzin bepred)

Ya. Ar vilinerien 'zo pinvidig. Gouezet am-eus dija ez oh bremañ ar brasa leveour deuz ar vro. Me 'gred ho merourez 'zo euruz ganeoh.

Alanig

Me n'her hredan ket.

Jord

(izel da Soazig)

Eur lapous divalo eo, lezom hañ sioul. *(uhel)*. Soazig, me 'm-eus degaset deoh eur memor⁴, n'eo ket deuz ar Chin ; ne oa eno netra evidoh, mez deuz Brest.

Soazig

Penaoz ! C'hwi hoh-eus soñjet ennon ?

Jord

Sell ! ar goulenn-ze ! dalit eur ruban voulouz gand eur groaz ; hennez a vezo brao en-dro d'ho kouzoug.Êsait hen da weled.Kontant oh ?

Soazig

A volontez vad.

(Soazig a ra hag en em zell en eur sklasenn⁵ ; ha gand laouenedigez) ;

O ! me ho trugareka a greiz-kalon. Kaer meur eo, hag ar groaz a zo kaer-tre.

Jord

Mond a ra deoh, da blijoud dreist.

Alanig`

(a zao hag a gemer e fuzuill)

Mond a ran kuit *(entre e zent)*. Kartier-mestr milliget ! *(Izel, da Vari-Job)*. Me 'm-eus lakaet en eur antreal dindan an arh, eur voutaillad rom ; hini mad eo. koustet en-deus din ker a-walh e Lannuon ; an dra-ze a raio vad deoh evid ho terzienn.

Mari-Job

Penaoz ho trugarekaad ? A ! ya. va zerzienn villiget !

Alanig

It gand an diaoul gand ho terzienn, mez leverit evidon eur ger da Zoazig. C'hoant am-eus d'he haoud, kleved a rit ? Pa vo gullo ar voutaill e vo unan all.

Mari-Job

Anaoud a rit he arvez penneg, mez me 'gomzo dezi heb mank, mestr Alanig.

Alanig

Noz vad, ar gompagnunez, n'ankouezit ket da zond da baea diriaou.

⁴ eur memor : eun eñvoradenn.

⁵ eur sklasenn : eur mezelour.

Pevare leh-c'hoari

Ar memez re nemed Alanig

Soazig

(gand eun huanadenn a zizamm)

Erfin, eet e' kuit !

Jord

Eun ours gwirion eo : beh mad dezañ !

Mari-Job

Soazig, kont an arhant a-raog dastum ar yalh.

(Houmañ he digor, he gollonder war an daol hag a leusk eur griadenn).

O ! va doue ! ar re-mañ 'zo peziou plom ; ni 'zo laeret.

Youenn

(spouronet)

Doue, se n'e' ket posubl : evesaet am-eus ar skoedou, hini hag hini, m'hen tou war ar groaz.

(Mari-Job ha Jord a evesa ar peziou).

O-daou

Peziou plom int !

Mari-Job

Va Doue, pebez darvoud ! Penaoz ho-peus greet, Youenn ?

Youenn

(o ouela)

Gwerzet em-eus an ouner er foar, resevet am-eus an arhant en ostaliri ar "Lion d'or", hag abaoe, ar yalh n'he-deus va huitaet beteg ar momant ma 'm-eus lakaet anezi amañ bremaig. Daonet e vin ma laran gaou.

Soazig

Ha n'ho-pefeh-c'hwi ket dre zarvoud, e-pad eur pennad, lakaet ar yalh en eur leh en hini unan bennag en eur dremen en-dije gellet he laerez ?

Youenn

Nann, kant gwech nann, reuzeudig ma'z on. C'hwi 'h a da gaoud disfi ouzon bremañ. A ! n'am-eus nemed mond da 'n em grouga.

Soazig

(outi he-unan)

An istor-mañ a zo gwall-souezuz.

Mari-Job

Youenn, eur servijer koz ha leal eveldoh ne hell beza eur munud disfiziet outañ ; c'hwi 'zo koulz lavared deuz ar gerent... mez hemañ a zo eur holl spontuz, ha Doue a oar penaoz e hellfom-ni 'n em denn pazegwir emañ an termen diriaou.

Jord

Itron ar Bihan, na gemerit ket a zoursi ! Me 'zo pinvidig ; en Pekin, evid 'n em veñji deuz ar Chinoed louz-se, on-deus pillet eun tamm en peb leh. Petra 'fell deoh ! ar brezel eo. An Eskob deuz ar leh hag ar visionerien o-deus prenet diganeom ar benviou ar priz-se evid gwiriou war baper on-deus touchet en Marseille, raktal ma

oam distro. Evid va lodenn em-eus bet daou-vil lur : ouspenn, me ‘m-eus c’hoaz eun diskont en bureo an dud a vor en Montroulez, pemp-kant skoed warn-ugent : se n’eo netra, warhoaz ho-po anezo.

Soazig

O ! Jord, penaoz ho trugarekaad ?

Jord

C’hwi ‘rento din-me an arhant-se eun devez... eun devez, (*o selled ouz Soazig*) pa gerfet... Eun afer ententet eo.

Mari-Job

Jord, ra vezi benniget, va faotr.

Jord

Bremañ, noz vad deoh. Noz eo, ha va zad a gle ‘n em houlenn petra ‘teuan da veza.

Soazig

(*a ya war-zu eun arh hag a gemer enni eun dra bennag*)

Jord, en trok deuz ho foular, va lezit da rei deoh eun dra bennag. Dalit, hounnez ‘zo eur vedalenn goz a zo en or famill abaoe ouspenn kant vloaz. N’he-deus talvoudegez vraz rag en koueor e’ greet.

Jord

Ar pezh a deu diganeoh, Soazig, a dalv muioh evid aour.

Soazig

C’hwi ‘zoñjo marteze ez on diskiant... mez ar vedalenn-ze a dalv ouspenn : an donezon dreist-natur he-deus da ziwall deuz ar maro kriz.

Jord

(*o c’hoarzin*)

Deuz ar maro kriz ? tehet am-eus outañ er Chin ha ne gredan ket her haoud amañ, mez m’he dougo er soñj ahanoh.

Soazig

Her prometi a ret din ?

Jord

M’hen tou : gwelit (*he lakaad a ra en-dro d’e houzoug*). Dem.Noz vad d’an oll, ha dreist-oll na rit ket a vilou. (*Sortial a ra*).

(*Eun nebeud amzer a dremen : kleved a reer eun tenn fuzuill : Soazig ‘n em strink er-mêz*).

Soazig

Piou ‘zo aze ? piou ‘n-eus tennet ? petra a dremen ? Jord, Jord, bleaset oh-hu ?

Jord

(*a-ziabell*)

N’ouzon ket ; n’eo netra ; noz vad ; kouskit dizoursi, Soazig.

Soazig

Ar vedalenn he-deus e ziwallet.

Eilved arvest

Melin Bod Free

(Alanig 'zo azezet e-keñver eun daol war benn an hini 'zo lakaet kement 'zo red evid servija eur pred. Mari-Job ha Soazig a antren).

Kenta leh-c'hoari

Alanig, Mari-Job, Soazig

Alanig

(goapauz)

A !Aze ez oh ! deut oh da houlenn diganen eun termen. Nann, nann, gwir am-eus d'am arhant, ha red e' din hen kaoud...me 'gaso deoh an urcher.

Mari-Job

(o tenna eur yalh)

Mez aze emañ hoh arhant, mestr Alanig, pemp skoed warn-ugent, c'hoantait o honta.

Alanig

(gand eul lamp spont)

Arhant ! c'hwi hoh-eus lavaret arhant ? Pzeleh eta hoh-eus hen kemeret ? 'M-eus ket ezomm aneze...

Soazig

(o selled ouiañ en e zaoulagad)

Mestr Alanig, respontit din. Penaoz oh erru m'ho-poa soñjet n'on-devoa ket arhant on gouel-Mikêl ?

Alanig

(oh argila, mez goapauz)

Arsa ! an istor 'zo anavezet : ho mevel Youenn e-neus roet da anaoud d'an oll 'oa bet laeret. Me 'lavar, me, ar pez am-eus klevet, ha ne ouien ket ho-poa arhant all kuzet : c'hwi 'zo en peb amzer o youhal dienez.

Mari-Job

Gwir eo, ni'zo paour, mez ober a reom er memez tra enor d'an aferou.

Alanig

(konta a ra ar skoedou hag e taol unan)

Hennez er foz.

Soazig

(goustadig)

Nann, hennez 'zo mad, roit deom eun diskarg.

Alanig

('N em lakaad a ra da skriva, hag a amzer da amzer, e hrozmol entre e zent)

Arhant o-deus ! penaoz se ? Me 'h a en gwirionez da greski o friz feurm.

Soazig

Ne hellit netra : or lizer-feurm a red c'hoaz evid tri bloaz ; goude ni 'h aio e leh all.

Alanig

Setu emañ ho tiskarg, c'hwi 'zo eun droug spontuz ennoh ouzin-me, Soazig, petra 'm-eus greet deoh eta ?

Soazig

(Goude beza lennet an diskarg her pleg hag her lakaad en he godell).

Nebeutoh e vijed, mestr Alanig, eun eilved goulenn am-eus da ober deoh.

Alanig

(o c'hoarzin)

Me ho responto a volontez vad, n'ho-peus ket komzet ouzin biskoaz kemend-all. Soazig, eur blijadur eo evidon kleved an ton deuz ho mouez.

Soazig

(o tostaad outañ, he daoulagad en e re).

An tenn-fuzuill-ze tennet war Jord ?

Alanig

(yen)

Ahanta ?

Soazig

N'oh ket heb beza klevet komz a ze ?

Alanig

Heb douetañs, mez an tenn ne oa ket en gwirionez evitañ, a-hend-all, her hredi a ra, eñ ivez, piou a helle kaoud droug outañ amañ ? Beza 'oa unan deuz ar vrakonerien iñfam-ze 'zo 'n em daolet war ar vro, hag an hini, heb douetañs, a vize eur had. Mez, gortozit, bremañ pa 'h e' an douarou din, c'hwi ah a da weled ma ne vezit ket an orin fall louz-se sernet⁶ hag enklasket, fiziit ennon.

(Tostaad a ra da Zoazig).

Pardonit din, Soazig : me 'zo aliez froudennuz ha garo ; bet on bet loudour en ho keñver hag ho mamm : keuz am-eus da ze. Gouzoud a rit pegement ho karan, Soazig ; n'em-eus c'hoant da gaoud evid gwreg nemedoh ; roit din ho torn ha va hini a vo skañv deoh.

Soazig

(pellaad a ra)

Birviken, c'hwi 'oar se mad, birviken.

Alanig

Diwallit, ma lezit va dorn da boueza warnoh, me ho flastro ; an eil pe egile, pe va dorn 'n em unano d'ho hini, pe me ho pruzuno.

Soazig

Mamm, deom ahann.

Alanig

Nann, gwelit, greet am-eus pourchas eur verenn.

Soazig

Ni ne gemerfom netra diganeoh. Deus, pa laran dit, mamm.

Mari-Job

Mez, va merh, mestr Alanig 'zo eun den mad ha ne vefen ket fached da zebri eun tamm.

Soazig

⁶ sernet : galleg. "enket".

(ouz he hemer dre an dorn)

Te ‘zebro er gêr.

Alanig

(droug ennañ)

Mad, pa n’he-deus ket Soazig c’hoant da gemer netra, den ne zebro. *(Digeri a ra ar prenest hag e taol ar bara hag ar hig er-mêz)*. Evid ar hi e vefont. Bleir, tap aneze. *(Mari-Job ha Soazig a ya er-mêz)*.

Alanig

Chomit eur pennadig, Mari-Job ; daou her am-eus da lavared deoh.

Soazig

(o sacha he mamm)

Kleved a rez ahanon, mamm, deom kuit.

Mari-Job

A ! te a enoe ahanon, ‘benn ar fin ; droed am-eus da gomz d’ar mestr Alanig, a gredan. *(Soazig a bella)*

Alanig

Piou eta e-neus prestet arhant deoh ?

Mari-Job

Jord an Duc eo.

Alanig

(o trehi eur fiñvadenn a goler entre e zent)

Gleet ‘oa din doueti a ze *(uhel)*. Lavaret am-eus deoh em-ije Soazig ; ober a ra d’am gwad redeg evel plum bervet, c’hoant em-eus d’he haoud. C’hwi n’it ket, a gredan, da zimezi anezi da eur penn skañv dibenn ha paour ; roit anezi da eun den hag he hemero heb arhant, hag he graio pinvidig hag euruz... me e’ an den-ze.

Mari-Job

O ! mestr Alanig, ma ne zalhje se nemed diouzin !

Alanig

(o selled ouz an nor)

Ho merh ‘zo erru pell... Deut da gemer eur banne rom *(oh eva bremañ emaint)*, ha bezit disfi ouz an amourouzien a ra an dro da Zoazig ; komzit dezi ahanon-me.

Mari-Job

M’her promet deoh, mestr Alanig ; deiz mad.

Eilved arvest

Plasenn Vulian, deiz ar pardon, peizanted ha peizantezed ; eur vandenn 'zo azezet war voger ar vered a zo tost d'an iliz, eur vandenn all deuz taol e-tal eun ostaliri.

Kenta leh-c'hoari

Alanig, Jord, Floh, Soazig, Michela

Michela

(gwisket kaer, 'zo azezet war ar voger en-keñver Jord)

Petra 'zoñjit-hu, aotrou an Duc ?

Jord

(dievez)

Mez... soñjal ennoh-c'hwi, dimezell.

Michela

Na lavarit ket a hevier eta ; c'hwi 'zoñj en Soazig ar Bihan.

Jord

Me 'dou deoh ne ran ket.

(Soazig a dosta heb beza gwelet. Alanig he heuill).

Michela

Eo, eo, c'hwi n'am havit ken d'ho c'hoant.

Jord

Mar geller lavared, c'hwi 'zo eur gaerder wirion.

(Alanig a zell ouz Soazig, an hini a bleg he fenn).

Michela

Klufaner, n'en don netra, me, en-keñver ho Soazig.

Jord

(doaniet)

N'e' ket ar memez tra... n'hellan ket displega deoh...

Michela

(gand c'hwevder)

Me 'n em houlen petra 'hell ho tenna war-zu ar plah yaouank-se : c'hwez ar hraou saout 'zo ganti. O ! e gwirionez, pa zistrofet d'ar vro da 'n em diazeza, e vo deread evidoh kaoud eur wreg da houzoud goro ar zaout, mered an amann, troha ha dastum ar foenn, soagni ar moh ha ren ar hezeg ! Mez, evid lavared gwir, kredet em-ije penaoz eur paotr yaouank evelдох en-dije kavet gwelloh eur plah yaouank deuz eur rumm all evid he diazeza en e di. Red e' ma vefe an oll c'hoantou er bed.

Alanig

(sioul, da Zoazig)

Ha ne respontfe netra dezi !

Michela

Sell ! va botez-ler 'zo diskoulmet ; felloud a ra deoh va zikour ?

Jord

A ! gand plijadur, dimezell.

Michela

N'am anvit ket evel se ; leverit din "Michela". Nim 'zo 'n em welet abaoe pell a-walh a amzer 'zo, me 'gred evid se. Mez gwelom, skoulmit din ar votez-se, na c'hwi 'zo heb izign⁷.

Jord

Me n'ouzon ober nemed skoulmou martolod.

Michela

Grit din kentoh eur skoulm a garantez.

Jord

A ! Michela..

(hi a astenn dezañ he dorn hag eñ a bok dezañ).

Alanig

Gweled ha kleved a rit, Soazig ? Nann ! ar penn skañv-ze, ar merhetaer-ze, ar luker merhed yaouank⁸-se, ne hell ket beza evidoh, her zantoud a rit, ha c'hwi her hompren, me 'zo sur a ze ; mez hoh ourgouill milliget a vir ouzoh d'hen anaoud.

(Pellaad a ra heb respont. Eur pennadig goude, Michela he-deus kuitaet Jord).

Jord

(da Zoazig, 'n em gavet ganti)

A ! setu-c'hwi aze erfin ! dizesperi a reen d'ho kweled.

Soazig

(yen)

Ha gwir ?

Jord

Brao e' deoh beza lakaet ar ruban am-eus roet deoh.

Soazig

Se 'oa oll nartel, Jord.

Jord

(o kemer he breh)

Piou a ra an oll drouz-se en ostaliri ar Haro Braz ? Me 'bari e' ar farser-ze a Floh... Deom da weled. Petra a gontez aze, Floh ?

Floh

(azezet e-tal diou blah yaouank, a ro dezo kraoñ hag amandez, hag a ginnig dezo da eva).

Gweled a rez, regali a ran ar merhed yaouank dudiuz-mañ. Debrit⁹ ar re-ze eta : C'hwi n'ho-peus ket a zent kaer evid netra, me 'gred. Kleo 'ta, Jord, lentoh int evid ar Chinoazed bihan.

Jord

Deus, deus, na gomañs ket da lavared diotach.

Floh

⁷ na c'hwi 'zo heb izign : ma n'oh ket diampart.

⁸ ar luker merhed yaouank : ar melezeur merhed-yaouank

⁹ Debrit : sellit a-dost outo.

(hanter vezo)

Diotach, diotach ? A ! lavar ‘ta, va hamalad koz, te ne grañches ket war Chinaoazed, du-hont, me ‘gred. Ha setu eur person prezeger er hiz nevez ! (ouz en em adresi d’ar merhed yaouank). Sellit ouz an amandez-se (ober a ra an neuz da denna e zaoulagad war-zu e zaou ividig), ar re-ze ‘zo o daoulagad faoutet evel-se, hag o zreid ! A ! m’ho-pije gwelet o zreid, o zerri a reer e boestou evid mired outo da greski, ha neuze int bihan, ker bihan m’o dalher en dorn, hag e poker dezo.

(Ar merhed yaouank a hoarz. Floh a lonk eur werennad).

‘Med abalamour int eun tamm melen, ar Chonoazed. Mez se ne ra netra, mond a ra evelkent, n’e’ ket ‘ta, Jord ?

Jord

Ro peoh ‘ta, direzoni a rez.

Floh

Se, dimezell, ober a ra din c’hoarzin, kamalad ; Jord, ankounac’haet ho-peus Tsi-Le ha Pao-Tse ?

Soazig

(o vousec’hoarzin)

C’hwi ho-poa anaoudegeziou bihan...

Jord

(diêz)

Deom kuit, Soazig.

Floh

Nann, pas a-raog beza kemeret eur chopinad sistr.

Michela

(o tostaad)

Ha me, ne beder ket ahanon ?

Floh

Mez geo, seul vui a re foll, seul vui e c’hoarzer ; me ‘h a da gana deoh eun dra bennag :

Na me da gar, o ! koef Breizez

Rag da verhed koant Buhulien

‘Vel en eur prenest ansien

Te ‘ro doareou eur werhez,

Mez ‘liez lutined diaoulou

‘Ra dit or¹⁰ eun dañs-tro follet.

O ! koef gwenn ! te ‘zo nijet

Laouen-braz dreist ar milinou.

Eun nozvez, o ! merh digaket¹¹

Gand eur paotr yaouank kaer heuillet

‘Kreiz eur wenojenn deñval kerkent,

Da goef gwenn a zo saotret

En vên¹² deuz noz d’ar mintiniou.

Klask da goef, simbolenn wenn.

Red ar e lerh, nijal a ra,

Louen-braz dreist ar milinou.

(An oll re a strak o daouarn. Eva a reer).

¹⁰ or : ober.

¹¹ digaket : didro.

¹² En vên : en aner.

Michela

Sell, deiz mad,dimezell Soazig ! Ne weler ket ahanoh aliez dre amañ.

Soazig

(yen)

Bep sul.

Michela

A ! Pebez ruban kaer ! diskouelit ar groaz (*goapauz*) ; heñvel mad a-walh ez eo ouz arhant ? Peleh eta ho-peus-hu he frenet ?

Soazig

Petra a hell se ober deoh ?

Nann, kement-mañ a zo eur zoñj-memor.

Michela

(gand eur c'hoarz fallagr)

A ! divinoud a ran... a-brepoz, lavaret zo din ez afeh, ho mamm ha c'hwi, da guitaad ar vro drist-mañ a Goad-Free.

Soazig

Trist ? Se a hell beza ho mennoz ; me, he har, he haroud a ran en he sioulder hag en he haerder, an draonienn dianavezet-mañ, leh e red war he fouez or ster ar Gwer. Ha neuze ar rivinou braz meurbed bet deuz a Goad-Free, zoken en o dilez mantruz, a gomz d'am ene ; ganet on bet en draonienn-mañ ha biken n'he huitain.

Michela

A ! na pebez mennoz iskiz !, me, me 'gar mil gwech muioh ar gêr a Lannuon. A ! pegoulz e hellin-me kuitaad Bulian ?

Alanig

(an hini a zo tostaet)

Ha rezon ho-peus, Soazig, an draonienn-mañ a Goad-Free he-deus he haerder, mez an oll n'o-deus ket a skiant a-walh evid her hompren hag hen tañva.

Michela

(o selled outañ a-bann)

Piou 'zo diresped amañ ?

Eilved leh-c'hoari

Ar memez re. Eur hlasker bara

Floh

Setu ar mesaer koz, roue ar glaskerien vara, n'am-eus ket gwelet tri bloaz 'zo ! Pastor koz, deus da eva ganeom. Lavar petra 'teuez da veza, kontant on deuz da hadgweled.

Ar Hlasker

(o vouc'hoarzin)

Deiz mad deoh, yaouankiz kaer ; va fedi a rit ? n'e' ket da refuz.

Floh

(o c'hoarzin)

Pebez êr-vad en-deus eñ ! Pastor, te intero ahanom oll. Deuz peleh e teuez 'ta ?

Ar hlasker

Bennoz Doue a zo warnon (*ober a ra sin ar groaz*). Degouezet on disadorn diweza en prespital Rospez. Ober a reed jubile ar person, hag hemañ 'n-eus greet din chom da leina er gegin. Pebez pred ! ma Doue, ma Doue ! N'em-oa ket gwelet biskoaz kemend all a blajou na kemend a voutaillou ! Disadorn 'oan antreet er Finister. Eun eured vraz a oa en Lanveur ; eiz-kant den deuz taol. A ! pebez friko 'm-eus greet eno c'hoaz ! pebez kovad !

Floh

En gwirionez, pastor, ober a helljes eur vicher falloh.

Ar hlasker

Ya, mez beza zo amzeriou didruez, rag an oll dud ne roont ket gand largentez... Goude oll, pa hellan kaoud deuz ar mintin va banne jigodenn¹³ ha va hornad butun, me 'zo euruz.

Floh

Hag hirio az-pezo (*rei a ra dezañ eur pezh arhant*), mez te 'evo hirio da yehed ar Chinoazed (*an oll asistanted a ro eur gwenneg bennag d'ar paour*).

Ar pastor

Me ho trugareka... *Pater noster (e lavared a ra)*.

Jord

Nemed, pastor, red e' kana deom eun dra bennag.

Ar pastor

O ! a volonte vad. (*an oll a dosta outañ*).
(*kana a ra war "an hini goz »*).

'Vid ankounac'haad an diluj¹⁴
Pa goueze dour d'ober distruj
Noe a grias, me 'gred,
Ober gwin a zo red.
Ober reas kement ha ker mad
En eun taol-kont e skiant-vad
En foñs e donell kouezet
Mez leun a zour ne oa ket.

¹³ jigodenn : ? "gwin-ardant"

¹⁴ diluj : galleg.

Noe 'gavas mad an dra-ze.
Se eo ivez va ali-me.
Pez 'oe penn-kaoz, me a gred,
E veze mezo bepred.
Salud, roue an everien,
Ra vezi meulet da viken.
Hag ar gwinn greet ganez-te
'Pad an eternite

Bremañ (*poelleg ha farsuz*) eh an da ober va devosionou. Bet am-eus eur pezh gwenn evid ober diou dro d'an iliz war bennou va daoulin hag e' red din derhel da vale. Deiz mad deoh oll, yehed mad hag ar baradoz da fin ho puhez.

(*Eva a ra eur werennad all hag eh a kuit*).

Floh

Pebez den drol ! memestra eo euruz.

Michela

(*Da Jord*). Prometet hoh-eus din eun dro dañs bremaig. Ar biniou a gomañso hebdale. Dond a rit ?

Jord

(*doaniet*)

Me ? me 'm-eus prometet deoh ? (*Selled a ra ouz Soazig*)

Soazig

Me n'on ket jalouz ; it da zañsal, Jord.

Michela

(*goapauz*)

Ne ouien ket, Jord 'oa red deoh kaoud permission.

Jord

Mez nann, e gwirionez... Mez, gortozit eun nebeud.

Floh

Deom, sikan¹⁵ ebed, polezed, deom-ni en diabarz ha da ober evel du-hont ; an dimezelled a ya da zilamm o hoefou, evid diskouel deom o bleo ; hag e vo dibabet rouanez ar pardon.

Michela

A volonteiz vad (*lezel a ra he bleo da goueza*). D'ho tro, Soazig.

Soazig

Mez me ne welan ket an ezomm da...

Michela

Diskouelit eta ho pleo, me 'garfe gweled en petra int heñvel ouz an an heol.

Jord

Disparkit anezo, Soazig, dre heñvelidigez ; gwelit re Michela, galloud a heller o zouza evid ober gante louizou aour.

¹⁵ sikan : galleg. arguz.

Soazig

Me 'rey, p'hoh-eus c'hoant, Jord, mez me 'gav kement-se oll, eun nebeud diboell. (*Lezel a ra he bleo da goueza*).

Floh

(*estlammet*)

A ! na pebez pennad bleo du ! Goloi a reont he dremm ! Merhed bihan Shangai n'o-devoa ket kemend-all !

Michela

(*hegasuz*)

Melen-aour, pe du, pehini ar gwella ganeoh, Jord ?

Jord

(*o c'hoarzin, mez gand eun êr diêz*)

Kement-se n'e' ket eur goulenn leal d'ober ouzin.

Floh

Deom, oust¹⁶ ! Lakit ho koefou. Setu ar prosesion o tond er-mêz.

Soazig

Jord, Jord, c'hwi a ra poan din.

Jord

Poan ? (*Pokad a ra d'eur guchenn deuz bleo Soazig*).

Michela

(*a bleg war-zu Soazig hag a gemer he breh*)

Sellit mad ouz va bizied bihan ; diframma a refont hoh amourouz a-dre ho taouarn pounner.

Soazig

(*yen*)

Ha gwir ?

Michela

Mond a ran, Jord ; c'hwi'oa karantezusoh bremaig war voger ar vered hag a-raog m'eo erruet ar plah yaouank-mañ... sell petra eta a zougit aze en-dro d'ho kouzoug !...

Jord

Netra, netra...

Michela

Diskouelet da weled ; me 'zo kuriuz.

Soazig

(*war eun ton rebech*)

Jord.

Michela

A ! eur vedalenn ! pebez medalenn ! en koueor ken ledan e' hag eur plad kegin ; nag hi 'gle ober debron deoh en ho peultrin ! (*c'hoarzin a ra*) ; hag ar ruban du-mañ, ha me 'gompren en liou d'ar ruban all, eur prezant¹⁷ digand muia-garet, heb douetañs ; mez, fentuz eo, c'hwi 'oar ? Va lezit da hoarzin ! mez n'e' ket eur vedalenn eo, hemañ 'zo eur plad.

¹⁶ oust : galleg.

¹⁷ prezant : galleg.

Jord

Lezit ar vedalenn-ze ; eur soñj memor eo.

Michela

(krog enni)

Nann, nann, re drol eo ; roit anezi din-me !

Soazig

(drouglivet)

Jord, me ho ped... n'e-meus ket a hoant e vefe va medalenn... ho medalenn a jomfe etre he daouarn.

Jord

(muioh-mui diêz)

Mez kement-mañ 'zo eur farserez, Soazig, ez a d'he renta din.

Michela

Roit din ar vedalenn louz-se, pa lavaran deoh, Jord : me 'roio deoh unan vihannoh, mez kaerroh, en aour... Ar seurt prezantchou-ze a roit, Soazig ?

Soazig

(a ro dezi eur grabanad)

Pez divez, teod naer-wiber, setu aze va respont.

(estlamm e-touez an oll).

Jord

O ! Soazig ! Petra a ret-hu ?

Alanig

(o tistrei)

Greet he-deus mad o kelenn ar gokinez¹⁸-se, ha c'hwi, an hini a bretant¹⁹ karoud Soazig, ne ouzoh ket hepken nag he souten nag he divenn.

Jord

Me ne anavezan gwir ebed deoh da gomz ouzin evel-se, mestr Alanig.

Eur peizant

En Merouri Kerhorn emañ an tangwall.

Soazig

(o trei he divreh)

O ! va Doue, ha va mamm 'zo heh-unan er gêr !

Oll

Deom da Gerhorn.

(En eun iñstant a blasenn 'zo goullo ; an oll a red entrezeg Kerhorn, Alanig unan ar re genta. Michela a jom heh-unan, ruz gand ar vez hag o ouela).

Floh

(o riñsa e werenn)

Ne anavezan ket ahanoh, plahig, mez me 'gav ho-peus an êr deuz eur pezh fall.

¹⁸ : galleg.

¹⁹ a bretant ; galleg.

Trede arvest

Kenta taolenn

Kenta leh-c'hoari

(Soazig 'zo heh-unan, azezet e-tal an oaled, he fenn entre he daouarn)

Soazig

Pebez doan din ! Lavaret e vefen gwreg da Alanig Derrien, klask a ran e-vên²⁰ dastum va zoñjou : va spered paour en em goll, ha me 'gred e teuan da veza sod ; An darvoudou a zo 'n em hastet kement en eur redadenn ken direal²¹ ma ne ouzon ken pe me 'zo o huñvreal pe a zo divun. Tangwall, Koad-Free, ar rivin evidom. Rankoud va mamm ha me mond da chom d'e di, d'ar vilin. Maro Jord kaketerezou²² ar vro, va brud-vad o vond da goll, ar le greet d'am mamm war he gwele a varo. Nann, biskoaz, ar sort maleuriou n'o-deus bet kouezet war eur gristenez. Va Doue, ho-pet truez ouzin. (*Gouela a ra*).

²⁰ e-vên : galleg. en aner

²¹ direal : diroll.

²² kaketerezou : fleperezioù.

Eilved leh-c'hoari

Soazig, Alanig

(Alanig oh antreal a azez en keñver Soazig. Soazig a ra an neuz d'en em denna).

Alanig

Nann, Soazig, chomit aze ; poent an disklêriadureziou 'zo erruet. C'hwi 'zo hirio va gwreg dirag Doue ha dirag an dud.

Soazig

(o troha e gomz)

Ho kwreg ! Dalhit soñj deuz ar pezh am-eus lavaret deoh : kemeret am-eus hoh ano evid savetei va hini deuz an dizenor, evid na vin ket kemeret evid ho mestrez ; setu oll : me n'ho karin birviken, me 'zento ouzoh evel servijerez, mez na houlennit ken tra all diganen.

Alanig

Senti a zo dija eur henta tra, eur genta viktor²³ gonezet. Soazig ; ar rest a deuio diwezatoh. C'hwi ne hellit ket, hen adlavared a ran deoh, tehed deuz ho tarvoud.... C'hwi a-hell 'n em wea ha 'n em debati²⁴, me ho kavo bepred en kog tro an hent.

(Eur sioulder ; tana a ra e gorn).

evid ho kaoud, Soazig ? N'am-eus ket kombinat mad va flañ²⁵ N'on ket me erruet en penn ar mennoz hag enklaskenn ?

Soazig

Me ne gomprenan ket ahanoh.

Alanig

(astenn a ra dezi e zaouarn)

Ahanta, selaouit ahanon. Penaoz hoh-eus-hu kollet hoh arhant eun nebeud deveziou a-raog gouel Mikael ?

(Soazig a ra eur finnvadenn).

Deom, n'am ankrezit ket evel-se... Me 'ouie e-nevoa Youenn gwerzet hoh ouner ; me 'm-eus tapet ho yalh, hag am-eus he ramplaset²⁶ gand eur yalhad peziou plom, e-pad ma oah oh esa ar ruban voulouz en-devoa Jord degaset deoh, he hemeret am-eus, c'hwi ' zivin perag, evid ho kaoud dindan va galloud.

Soazig

Digalon ha laer ! drougsoñjal a ran, n'on ket bet tromplet²⁷.

Alanig

Galvit ahanon dre an oll anaoiou a gerfet. Me eo am-oa tennet eun tenn fuzuill war Jord, pa on eet deuz ho ti, o tivinoud en'em gareh, ha greet ganen va zoñj da nompas kaoud eun enebour.

Soazig

Fallagr ! me ho tiskuillo d'ar justis...

Alanig

(war e bouez)

Me eo am-eus lakaet an tan en Koad-Free, devez ar pardon. Petra 'ree din-me ar holl ? En eur devi an ti ho forse²⁸, c'hwi hag ho mamm, da zond da jom dindan va zoenn.

²³ viktor : galleg.

²⁴ debati : galleg.

²⁵ N'am-eus ket kombinat mad va flañ : galleg : n'am-eus ket renket mad an traou

²⁶ ramplaset : galleg.

²⁷ tromplet : touellet.

²⁸ ho forse : galleg. e lakaen ahanon dre red

Soazig

(o tifronka)

Va Doue, penaoz e hell kemend a fallagriez beza en eun den ?

Alanig

Me eo am-eus degaset deoh ar helou faoz deuz maro Jord en bourz ar *Redoutable* ; me eo am-eus diarbennet respont ar ministr d'ho lizer a zislavare ar helou. Kement-se oll, o greet am-eus hepken evid ho kaoud.

Soazig

A ! me 'm-eus kas ouzoh, me 'm-eus kas ouzoh evel n'am-eus biskoaz kasaet den ; me ho kasa evel eun naer-wiber hag eur hi klañv, digalon, laer, gaouiad, muntret ; me 'ray terri an dimezi.

Alanig

(o sevel e ziouskoaz)

Va anaoud a rit, bremañ, Soazig. Kredi a rit c'hoaz e hellfeh 'n em denn diganen, mina a ran an douar war an hini e valeit, heskennad a ran an treustou deuz an doenn a zo a-zioh deoh ; me 'lak en-dro deoh mil ere ; me 'zo didrehuz hag oll-hallouduz. Bet on-deus eun emgann hag em-eus ho touaret ; hoh ourgouill ho sikour da adsevel, mez bremañ e' hoh esa diweza. Gwelet ho-peus petra hellen da ober ha petra am-eus greet. Ehanit eur stourmadeg didalvoud, Soazig. C'hwi ho-peus aon araokon bremañ. Hennez e' ar paz kenta a gas d'ar garantez. Soazig, bezit din-me...

(Klask a ra pokad dezi).

Soazig

Biken , biken, lezit ahanon, c'hwi a ra horrol din.

(Kemer a ra Soazig eur biñsetez 'zo o ruzia en tan hag e sko anezañ entre e zaoulagad. Alanig a laosk eur griadenn a boan, hag en em daol war ar leurdi.)

Ar ridoch a gle diskenn goude war-lerh ar c'hoari-mañ.

Trede leh-c'hoari

Eur miz diwezatoh

Alanig 'zo e zaoulagad hanter holoet gand edru mouchouer. Azezet eo en deñvalijenn, e gein tro d'ar sklêrijenn.

Soazig

(gand abafder)

Poan ho-peus ha kalz bepred, Alanig ?

Alanig

Eun tamm nebeutoh hirio, marteze, mez eur lagad din 'zo kollet hag egile ne dalv nemeur muioh gwelloh ; gwellaad a ray biken ? Me ne gredan ket. O ! na me 'm-eus gouzañvet poaniou ! Ar hevell ruz-se o tremen war va daoulagad, poan skrijuz, an deñvalijennn, ha bremañ en amzer da zond, ar gweled kollet, didalvoudeg, dishreet, hini eun dall, o treuzvarchi²⁹ deuz mein an hent... Setu ho pezh labour, Soazig, ha koulskoude em-oa roet ti d'ho mamm, greet am-eus ahanoh va fried, hag en distro, c'hwi ho-peus va zaolet en deñvalijenn ; c'hwi ouspenn, c'hwi a refuz din ho karantez.

Soazig

N'en em damallom ket, rag me 'hallfe lavared aze kalz gwasoh en ho karg, c'hwi ho-peus va gloazet en eun doare garo ha digalon ne hell ket beza ankounac'haet. C'hwi ho-peus va zachtet en desped din evel-henn eun taol spi. C'hwi ho-peus dismantret va buhez en oll esperañsou hag evurusted. En eur fiñvadenn a zispah em-eus dilammet diganeoh ar gweled, heb heb gouzoud, m'hen tou deoh ; ankounac'haet am-eus ne gler ket renta an droug evid an droug, ha penaoz ar veñjañs ne aparchant nemed da Zoue ; me a zo gwall doaniet deuz ar pezh am-eus greet deoh, me a zo brevet gand ar vez hag ar hlahar a ra din va fazi.

Alanig

(o tremen e zorn war e zaoulagad)

O ! na me a houzañv er momant³⁰-mañ *(Soazig 'astenn dezañ he dorn hag a ouel)*.

Alanig

Eun daelaouenn diganeoh ? *(Kas a ra e zorn d'e zaoulagad)*. Ma 'defe an daelaouenn-ze eun douster bennag, e rentfe, me 'zo sur, ar gweled d'am daoulagad, mez n'eo nemed eur c'hwervder. Me a zo kondaonet da jom en deñvalijenn. Honnez eo koulskoude ar gwella remed³¹ a hellfen da gemer, gwelloh evid oll urzou ar vedisined. santoud ho taelaouen danuz en-deus greet vad din. Soazig, karit ahanon, me a ankouezo oll, me 'bardono deoh ha c'hwi ivez a bardono din va hrimou³², greet abalamour deoh, kemennet dre ar garantez am-oa evidoh.

Soazig

(gand doan)

Nann, ne hellan ket ober se, c'hwi a zo 'n em gunduet³³ en eun doare re fallagr ha re digalon en andred an hini a garen.

Alanig

(o sevel droug ennañ)

Hag a garit c'hoaz, n'eo ket 'ta ? Me 'zivenn ouzoh lavared e ano dirazon *(eur sioulder)*. C'hwi a zoñj bepred da houlenn an dorridigez hag an didalvoudegez deuz an dimezi ?

Soazig

Nann. Ne 'zahaouo va ober a fallentez ; me n'ho kuitain biken ; me 'jomo d'ho soagni.

²⁹ treuzvarchi : streboti.

³⁰ momant : galleg.

³¹ remed : galleg.

³² hrimou : galleg.

³³ 'n em gunduet galleg.

Alanig

Ya, ya, c'hwi 'lavar ze ! Ha ma tistrofe ?

Soazig

Me a jomo em leh ha dever ; m'hen tou deoh.

Alanig

Leh ha dever ! mez nann leh a garantez.

Soazig

Me 'lavar a zever, biken ne guitain ar leh-se.

Alanig

Me 'h a da gemer eun nebeud ehan. Soazig, c'hwi ho-peus touet senti ouzin, hirio e tout n'am huitafet biken ; chom a ra ganeoh eun trede le ; an hini d'am hared, me a hortoz gand fiziañs.

(Mond a ra kuit)

Pevare leh-c'hoari

Soazig, Jord

(Skei a reer war an nor. Jord a antre)

Jord

(goapaer)

Deiz mad, itron Derrien, Dampred ! Na kaerra milin, na pebez irhier lorhuz !

Soazig

(ne zeblant ket beza surprenet ouz e weled)

Jord, roit peoh ! na hoapait ket, n'am ankenit ket. Me 'houzañv a-walh, ma ouezfeh... Me 'm-eus kredet edoh maro.

Jord

(o troha he homz)

Ya, gouzoud a ran, Derrien, ar loen-ze, eo en-deus hadet ar vrud-ze dre ar vro... ha neuze ?

Soazig

En e di e oan, va brud vad a oa en riskl, greet en-deus eur helh breou en-dro din, an hini ne oan ket evid 'n em denna, hen eureujet am-eus, erfin, mez n'en don na ne vezin birviken e wreg... Me 'zo chomet fidel deoh, Jord va harantez, kredit ahanon, me ho ped.

Jord

Fidelite³⁴ fentuz da zimezi da unan all, hanter-dall war ar marhad, a zo lavaret din ; ha Soazig, an oll verhed a zo heñvel ha ne heller 'n em fizioud en nikun, m'her gwel.

Soazig

Mez, c'hoaz eur wech, n'em-eus greet nemed kemer e ano ; me, n'en don ket dezañ.

Jord

Mez neuze, c'hwi a zo diskarg ; surprenet en-deus ho konsantamant³⁵ en eur drompla ahanoh war e gont. Se ne dalv mann, hag on hent 'zo libr ; al liamm a stag ahanoh d'ar loen-ze a zo hep talvoudegez. Ar person e-unan, a rafe terri an dimezi-ze, mez kement-se a goustfe re ger hag a houlennfe re a amzer ; ahann di en-defe ho lazet ! Deut ganen, Soazig, me 'zo distaget deuz ar servij ha beza 'm-eus eun tamm arhant. Me 'labouro. Ni 'h aio da jom en eur gêriadenn hag a choazfet, pe en eur gêr, dizoñjet hag euruz. An Derrien fallagr-se ne verit soñj ebed, ; n'ho-pet ket remors³⁶ ebed ; va muia-garet, deuit. O ! pegen euruz ez om da veza.

Soazig

Jord, na dentit ket ahanon, na houlennit ket diganen an imposubl³⁷. Me 'zo bet eureujet dirag an aoter.

Jord

(a gemer he daouarn)

Mez c'hwi 'zo o paouez lavared din ne deoh dezañ netra ! Deuit, kuitait an deñvalijenn evid ar sklêrijenn, ar boan evid an evrusted pafet ha lezit da viken ho poaniou en foñs ar stank trist-mañ.

Soazig

(oh en em denna kuit dioutañ)

³⁴ Fidelite : galleg.

³⁵ konsantamant : galleg.

³⁶ remors : galleg. morhed.

³⁷ imposubl : galleg.

O ! tavit. C’hwi a laka dirag va daoulagad eun daolenn ha na hell biken beza. Me ‘zo kondaonet da veva amañ gand va zistridigez teñval ; beza zo, gouzoud a rit, eur liamm all entre Alanig ha me, ha ne hellan ket da derri.

Jord

(froudennuz)

Me n’ho komprenan ket.

Soazig

Mantret on gand ar vez : me eo am-eus e rentet dall ;
(Jord a ra eur fiñvadenn a zurpren).

Ya, pa en-devoa anzavet ouzin en-devoa laosket eun tenn fuzuill, eun nozvez, c’hwi ‘oar ?

Jord

A ! eñ eo a oa, an haillevod !

Soazig

Pa ‘n-eus anzavet din en-deus miret ouzin da houzoud n’edoh ket maro, me ‘m-eus, en eur momant a fulor, skoet anezañ gand eur gevell ruz war e zaoulagad : her lakaet am-eus iñfirm, red e’ din eta dihaoui, en eur zikour anezañ da houzañv e boan ; ne hellan ket hen dilezel en e deñvalijenn hag en e zizesper, mez, Jord, me ‘jomo bepred fidel deoh.

Jord

Koaziou ha kaoziou ! C’hwi ‘zo en em veñjet deuz an oll boan en-deus greet deoh, ha just ‘oa ; n’hoh-eus netra da ‘n em rebech ; deut da veva ganen.

Soazig

(oh hija he fenn)

O ! Jord, me, ho mestrez ! penaoz e hellit-hu komz evel-se ?

Jord

C’hwi ‘zo iñkomprenabl³⁸ ; va mestrez ? ahanta, petra ? Gouzoud a rit ez eus merhed yaouank koant all c’hoaz er bed ouspenn c’hwi. Michela, dre egzempl !

Soazig

(o tifronka)

A ! Jord, nag eñ ‘zo fall komz ouzin evel-se !

Jord

Me ‘lavar deoh, mar karjeh ahanon, c’hwi a zilezje Alanig da vond da glask e chañs.

Soazig

Ne hellan ket ; va bourevi a rit ; va buhez ‘zo liammet d’e hini, c’hwi her goar mad.

Jord

(froudennuz)

Neuze, c’hwi n’am harit ket.

Soazig

(ouz en em strinka d’e dreid)

Me, n’ho karan ket ? mez, me ho kar, Jord.

³⁸ iñkomprenabl : galleg.

Jord

Kleo 'ta, me 'zo gwell ganen beza karet en eur feson sklêrroh. Kenavo, Soazig, hag evel n'em-eus ket a zoñj da chom paotr yaouank 'hed va buhez, ne vezi ket souezet da anaoud hebdale va dimezi.

Soazig

Jord, selaouit ahanon.

Jord

Nann, echu eo oll entrezom.
(*Mond a ra kuit*).

Soazig

Na gred ken d'am harantez ! A ! hemañ eo evidon an taol gwasañ.

Pemped leh-c'hoari

Alanig, Soazig

Alanig

Klevet am-eus moueziou. An nor 'zo bet serret a-frap. Piou eta a oa aze ?

Soazig

Jord e oa.

Alanig

(*o yudal*)

Plah fallagr ! Degemer amañ hoh amourouz !
(*He hemer a ra dre e verh hag e wask war he hig*).

Soazig

Grit ouzin ar pezh a gerot, lazit ahanon, se 'zo ingal din, mez na leveret ket eo Jord va amourouz ; c'hwi 'oar penaoz se n'e' ket gwir.

Alanig

(*o tiskregi*)

Mez c'hwi hen gar atao.

Soazig

Atao ! c'hoaz muioh abaoe m'hoh-eus êsaet e laza ha 'm hoh-eus greet e dremen evid beza maro abalamour da gaoud rezon ouzin-me.

Alanig

(*dousoh*)

Soazig, ma n'em-ije bet kommetet³⁹ an oll oberou am-eus anzavet ouzoh, ha c'hwi 'hellje va hared ?

Soazig

Na lavarit ket se ; me 'm-oa roet va halon da Jord hag bez' e oa evid bepred, mez me helle gweled ennoh eur mignon. Pa zoñjan er boan am-eus greet deoh, me gred a-wechou e hellfen kaoud karantez evidoh (*Alanig a drid*), mez en momantou all, an torfed braz euz ho puhez a 'n em stign dirazon hag a gas deuz va halon pep soñj a druez.

Alanig

Ha Jord, da ober petra e oa deut ?

Soazig

D'am goulenn da dehed kuit, da vond da veva gantañ.

Alanig

(*gand eul lamm-spont*)

Hag ho-peus respontet "ya".

Soazig

Respontet am-eus e oan dimezet, penaoz va flas a oa amañ, en ho keñver da viken ha ne felle ket din beza e vestrez. Va ofañset en-deus en eur feson garo oh ober din ar hinnig-se. Bremañ eo eet kuit en eur lavared din e oa c'hoaz merhed yaouank all er bed hag ez ee da zimezi.

³⁹ kommetet ; galleg.

Alanig

(joaiuz)

Her lavared mad a reen deoh devez ar pardon, an den-ze ne oa ket dign ahanoh, me hepken a halle hag a ouie ho kared... (*ouz he zenna wa-zu ennañ*). Me ne welan ket nemeur, a-veh e hellan gweled eun dra bennag deuz ho pizaj karet, deuz ho taoulagad kaer brun a garen kement na welan nemed eun nebeud euz ho flamm. (*en eun taol e sao e vouez*). Refuzet ho-peus e heulia ! Med distrei a ray an haillevod ; en em ober a ray klufan ; c'hwi her har bepred, en desped oll, ha leveret, c'hwi 'n em disido⁴⁰ eun devez bennag d'e heulia.

Soazig

Biken.

Alanig

(evel foll)

Nann, nann ! c'hwi ne vefet biken dezañ.
(*Gand e zorn serret e sko anzi en he zal, hag e kouez-hi evel eur bern*)

⁴⁰ disido : galleg ; décider.

C'hwehved leh-c'hoari

Soazig

(Alanig a zo a-dreg an nor hanter digor o selaou)

Soazig

(o tond enni heh-unan)

En peleh emañ-me ? Pe gousket, pe huñvreet am-eus ? (*Kas a ra he dorn d'he zal*). A ! ya, va skoet en-deus... Komz a reem deuz Jord, hag an dra-ze her breve... (*Eur pennad sioulder*). Ha gwir e vefe her haren atao goue e ginnig iñfam⁴¹ da ober ahanon e vestrez ? Hag eñ, mar am hare, perag nompas beza va eureujet en e zistro deuz ar Chin e-leh e tremen e goñje oh ober al lez da verhed yaouank ar vro, ha dreist-oll da Vichela ? Kement-se a oa dezañ eur froudenn, eun ebat dister, eur feson da dremen an amzer !... Lennet am-eus gwechall eur leor en hini ne gomprenen ket kalz a dra mez ag an hini eur frazenn he-devoa va skoet. Anaoud a reer ar garantez wirion dre ma hell ober an traou kaloneka... (*Soñjal a ra, he fenn en he daouarn*). Traou kaloneg, krimou memez heb douetañs. Neuze Alanig am haree en gwirionez. Ya, ar pezh en-deus greet oll evid va haoud a zo euzuz, mez kaloneg er memez amzer ; ya, eñ hepken am haree ha me am-eus hen rentet iñfirm⁴² evid e vuhez. (*Gouela a ra ha kerkent e sao*). Va Doue, ha me 'deufe da veza sod ? Ar vandenn am-oa war va daoulagad a zispak, ar voger a oa en-dro d'am halon a gouez.... daoust ha me a garfe Alanig ? Ar gasoni-ze am-oa outañ hag a reen kemend a neuz da gaoud, a gresken, ne guze hi ket eun deneridigez oll dianavezet ganen, ha penaoz ar garantez an hini am-oa evid Jord a vire ouzin hepken da êsaad... Ha lavared em-mefe her greet dall (*leuskel a ra eur glemmadenn druezuz*), mantret on gand ar vez... Ya, me 'wel bremañ, me gare Alanig, me her har !

⁴¹ iñfam : galleg : infâme. dismeguz.

⁴² iñfirm : galleg ; mahagnet.

Seizved leh-c'hoari

Alanig, Soazig

Alanig

(a antren, oh astenn e ziouvtreh, er re Soazig a deu da 'n em deurel).

O ! Va muia-garet, erfin !

Soazig

Alanig, dre druez, leverit din e pardonit ahanon. *(Alanig ne respont ket).* Komzit, mez komzit ouzin, en gras !

Alanig

(goude eur sioulder)

Va Doue, en gwirionez n'heller ket mervel gand ar joa. Komz a rit, va harantez. Neui a ran en eur mor braz a zudiou ag an hini ne remerken⁴³ ket ar fin ; pe me 'zo war an douar pe en neñv ? Me ne ouzon ket.

Soazig

Penaos dasprena va zorfed ! C'hwi ne welit ken.

Alanig

Eo, va muia-garet, petra bennag kennebeud, mez ho pokou am gwellaio ; gweled a ran c'hoaz a-walh evid lenn en ho taoulagad e leverit gwir, ha penaos am harit erfin. *(Azeza a ra Soazig hag e taoulin, he fenn war e varlenn).*

Soazig

O ! ya, c'hwi am zelaoue eta bremaig ?

Alanig

Ne gollen ket unan deuz ho komzou. *(Ober a ra karanteziou dezi).* Paourig karet am-eus skoet ken garo, me ivez am-eus ezomm pardon.

Soazig

Rezon ho-peus : ni a oa krouet an eil evid egile ; c'hwi a lavare din : c'hwi hoh-eus touet senti ouzin da nompas biken va huitaad. Chom a ra ganeoh eun trede da ober, an hini d'am hared, me hen gortoz gand fiziañs.

Alanig

Soazig, kement-mañ eo darvoud or buhez o peurechui an trede le ; c'hwi her gra hirio.

Soazig

O ! a greiz-kalon, hag evid ar vuhez oll !
(Ar hleier a zon a-ziabell).

Soazig

Me a gleo kleier.

Alanig

Ar re-ze eo kleier Bulian, ar hleier a eured, ar re a zon evidom. Soazig, digorit ar prenestou, me 'doufe eo sklêr an noz, ha penaos aotrou an neñv a sklêrijenn on evrusted.

Soazig

('h a er prenest)

An neñv a zo leun a stered... O ! eur steredenn rederez.

⁴³ remerken : galleg. ne welen.

Alanig

An amzer dremenet 'zo tehet da viken. Deuit, va harantez :ganeoh ar vuhez a 'n em zigor dous.Ni 'n em garo bepred, n'eo ket 'ta heb mennoz kuz ?

Soazig

Hen lavaret am-eus deoh ; me 'zo deohda virviken.